

## Minervois : mad evid ober gwin mad

# Fañch Broudig

---



# Eur vro zebeuz hag euz ar re gaerra toud eo Bro-Minerv – greom gand an ano-mañ evid ar galleg *Minervois* hag an okitaneg *Menerbès*. Torgennou ha menezioù euz eun tu, rag eno ive zo eur Menez du, gand traoñiennou don heñvel a-walh ouz pezh a anver eur hanyon en Amerik. Kêrbenn ar vro e-keñver ekonomiezh eo Olonzac, er blênenn : eur gêr vihan 1 700 a dud, hag eur hroazhent da vond etrezeg Narbonne, Béziers pe Carcassonne, eun tamm mad brasoh ha gwelloc’h anavezet.

E-keñver istor ar vro avad eo Minerve ar gêrbenn, pintet uhel war veg eur roh, a-uz diou riñvier vihan, izel-daonet an

dour enne en hañv, nemed adaleg ma ra glao. Eno ‘ni c’hoarvezas e 1210 unan euz emgannou kenta ar brezel eneb ar Gatared : koll e oa bet ar re-mañ ha taolet eur hant hag hanter-kant anezo en eun tan-keuneud. Hirie, n’eo Minerve nemed eun tamm bourhadenn vihan euz departamant an Hérault, 140 a dud nemetken o veva enni ‘pad ar bloaz.

Ya, med unan euz brava kêriadennou Frañs eh eo, sed e vez, soñjit ‘ta, beteg 300 000 a douristed o tremen drezi e-pad an hañv ! Kaji re. Ar wech diweza ma ‘m-eus bet digarez da vond di, em-eus gwelet pegen cheñchet eo abaoe 25 bloaz : en daou du d’ar ruiou n’eus ken kazimant nemed stalioù gand arzourien ha produerien win.

### Eur Breizad oh erruoud e Bro-Minerv

Pevar gilometr uhelloc’h ema parrez La Caunette, gand he zammig iliz koz euz an XIved kantved. Eno eo bet renevezet eun tamm deuz kreiz-kêr er bloaveziou-mañ, ha deuet mad an taol ganto. Kalz sioulloc’h evid Minerve eh eo. Buhez a zo evelkent, rag eun toulladou koñ-



verziou a zo, eun ostaleri, eur restaurant ha kaviou. Ha tri hant bennag a dud en oll er barrez. War-dro, n'eus nemed gwiniou, kazimant.

Penaos an diaoul e-neus greet an Tregeriad Jean Calvez d'arruoud du-hont da jom ? Ne oa ket en sell da veza eet war ar vicher gwin, e mod ebed : c'hoant e-noa da veza garajist. Nemed pa h eo distroet deuz brezel an Indochin e-kreiz ar bloaveziou 1950, e-

neus bet c'hoant kerkent d'ober anaoudegez gand ar vaouez yaouank - e "vae-ronez" pad ar brezel - a skrive lizerou dezañ. Dimezi o-deus greet Jacqueline hag eñ : *"Ar garantez a gomand da doud an dud dre ar bed-oll, emezañ. Erruet on-me 'barz bro ar Minervois, 'meus ket greet espres-kaer : chomet on gand ma gwreg, a zo ahann"*.

Chomet eo, ya, ha digoret e-neus eur garaj war e gont evel e-noa c'hoant

## Er broiou gwini

Pa oan e karg deuz "An taol-lagad", an abadenn geleier brezoneg war France 3 Breiz, em-oa bet klevet komz deuz Bretoned bet eet da veva ha da labourad e broiou ar gwin. Eet e oa eur Hastellad evel-se etrezeg an Touraine, med diskregi e-noa greet a-raog ma 'mije bet kavet an tu da vond beteg eno. Komzet e oa bet din deuz eur brezoneger oh ober gwin tro Bourdel : james n'on deuet a-benn da houzaout re vad piou a oa. Chañsusoh 'oan bet deuz tu ar Bourgogn : eur Bigouter deuz Tremeog, Louis Le Pape, a oa neuze mêr eur barrez vihan eun 200 bennag a dud du-hont, Dezizes-les-Maranges. Dre berz e wreg e-noa eun devez-arad pe zaou a wini en takad "Maranges", nepell deuz kêr Beaune, mar plij.

War on lañs, 'oam bet eet goude-ze da vro ar Champagn. N'it ket da gredi zo kement-se a Vretoned e penn an tiez braz hag a ra gwin spoum du-hont. Mibien d'ar Brestad Pierre Jestin (bet savet "*Les caves de mon père*" gantañ e Brest) a oa krog d'ober neuze, evid gwerza en Amerik. Dre berz ma hamarad Bernez Quillien e oan deuet da houd e oa kenvroiz all e-touez labourerien ar gwiniou, hag e oant... menh deuz urz ar Fransiskaned end-eeun. Euz ar henta 'oam bet digemeret ganto, ha gand o fatroned. Mad on-oa kavet ar champagn.

En diskar-amzer 1987, setu ma oam eet war-zu ar hreisteiz, da weled penaos en em gemere Jean Le Calvez hag e wreg Jacqueline da zastum rêzin ha d'ober gwin e bro ar Minervois. Gaby Bourles a oa paotr ar hamera en dro-ze. Ne oa biskoaz bet skipaill tele ebed a-raog er hornad-douar-ze o filma ar mende-mou. Abaoe om deuet, Jean Calvez ha me, da veza kamaraded vad. E verh, Françoise Frissant-Le Calvez hag he fried Pascal Frissant a zo pell 'zo dija e penn ar stal : er bed-oll pe dost e werzont o gwin Minervois en deiz a-hirio.

Fañch Broudig

# # Peb a damm blazig-blaz

# Fañch Broudig

d'ober. P'e-noa laket e dreid e bro ar gwiniogou avad, eo en em laket ive da zoursial deuz reou e vamm-gaer, d'ober rezin ha gwin. N'eus ket kalz a Vretoned o veza bet greet kemend-all, hag a ouije brezoneg en tu-hont. Seiz vloaz warn-ugent 'zo eo e verh, Françoise Frissant-Le Calvez, hag he gwaz, Pascal Frissant, a ra war-dro ar gwiniogou. Ken kaozeuz int an eil hag egile adaleg ma vez kistion deuz gwin.

## Penaoz kaoud rezin mad

Pa vez goullet digand Jean petra 'vez ezomm evid ober gwin mad, e respont "eur bern traou". Eñ, ar skiant-prenet e noa en eur gregi a oa hini eur mab labourer-douar yaouank deuz a Vreiz-Izel d'ar houlz-ze. N'eo ket bet re bell oll o teski penaoz en em gemer, ken eh eo bet estonet e amezeien hag a oa a-viskoaz war ar vicher gwin. Konta 'ra din petra 'vez red ober : "Da genta soagn ar gwiniogou, dê d'ober rezin mad. Rag ar rezin, goud 'rez 'walh, 'vez kleñvejou warne : mildiou, oïdium, preñved... Adaleg miz ebrel beteg fin miz eost. Ar mad hag ar fall a vez greet. Ma vent klañv c'hoaz e fin miz eost, 'vent ket soagnet ken. Ma vent bet dalhet mad, 'vez ket ezomm da dreti anê ken."

"N'haller ket kaoud gwin mad ma ne vez ket mad ar rezin", a lar Françoise deuz he zu. Displega he soñj a ra evel-henn : "Mad e vez ar rezin pa vez hervez an douar hag an terouar. An douar n'eo ket nemetken ar gwiskad ma vount ar plant warnañ, hag a voueter gand ludu NPK. Klask a reer kaoud plant gand gwrizioù a gresk mad, dezo da baka an elvennou meinek a vez en douar hag a vo adkavet goude ze 'barz ar gwin. Se eh eo labour an douar hag a ranker ober bemdeiz



'pad ar bloaz". An natur diouti hehunan ne rento ket kalz tra. Padal, ma sikourer anezi, e raio.

A-dra-zur, e vez red kaoud douar deuz se evid ober gwin. "Eistoh 'vid douar, eme kerkent Jean Calvez. Amañ zo berniou mein er gwiniogou ! Ar re wella dioute eo ar re zo ar muia a vein enne !" N'eo ket ar brodrierien artichaot pe kaol-fleur a larje kemend-all e Bro-Leon pe e Bro-Ouelo. Ha setu an den o tisplega din abalamour da betra : "An heol a domm ar vein. Ar vein a dalh an tommder 'pad an noz, hag a restaol anezañ d'ar rezin ha d'ar gwiniogou. Ar plant o-devez gwrizioù don. Pa vez kalz a vein war ar gwiniogou, an nebeud a hlao a gouez e-pad ar mizioù hañv a diskenn beteg ar gwrizioù, hag ar gwrizioù 'gav anê".

Dastum rezin 'zo bet greet a-viskoaz gand an dorn, nemed e reer muioh-muia bremañ gand eur mekanik. "Ni, eme Jean, a zo ar re diwezpañ d'ober gand an dorn". Koulskoude, tro 25 bloaz zo, o-deus bet êsêet ive gand ar mekanik : kontant 'oant e raje ar mekanik... labour eun daou-ugent a dud ! "Goust ket ken ker ober gwin gand ar

*mekanik. Nemed 'vez ket kerkoulz. Pa vez dastumet rezin gand an dorn, e vez dibabet dioustu war 'r blas, kichenn ar mekanik a dastum 'neze toud, pe 'vent poaz, pe 'vent brein, toud eh eont d'ober gwin".*

## **Ar gwin zo greet da veza rannet gand tud all**

Ha petra reer deuz ar rêzin, eur wech dastumet ? *"Ne vent ket friket mod ebed ! Pa vent lakaet da domma, ar hrohen deuz ar rezin a greuñv, ar ju a gomañs da redeg war-draoñ."* Lakaet vent 'barz kuviou da vezañ bervet. Serten gwin 'vez greet buan-ha-buan : *"Ar gwin nevez, tri devez da virvi a vez mad ! Ar gwin da vezañ miret 'pad pell 'vo laosket 'pad eur miz da virvi. Med birvi gorreg !"*

C'hoant am-oa da gleved gand tud a vicher petra eo gwin mad. Goud a oar mad Pascal ha Françoise Frissant deuz a betra e kaozeont : *"Gwin mad, emeze, a zo eur gwin a vez rannet gand tud all. N'eo ket ar memez hini evid an oll. Meur a stumm a zo da brizoud ar gwin. Da genta, 'ranker kavoud anezañ mad. Red eo kaoud c'hoant da dañva, beza kuriuz, beza prest da weled petore blaz a zo bet roet d'eur gwin n'anavezer ket c'hoaz. Ar gwin mad a zo kalz a frouez ha danvez ennañ, dilikad memestra, a vo santet an tannin, pas re, e-nevo dalh hag a vero mad er genou".* Sur eh on emaoñ a-du gante penn-da-benn !

Memez mod em-oa c'hoant da houd petra 'gont ar muia er gwin. *"Toud, toud, toud, a respont kerkent Jean Calvez. Ar pouez alkool, al liou, ar c'hwhez, ar blaz, toud a gontont. Toud ar gwini 'vez ket ar memez rezin enne.*

*Gwini 'zo a ra gwin gwenn, lod all eun tamm teñvalloh pe sklêrroh. Ar hrohen deuz ar rezin eo a ra e liou d'ar gwin. Hervez ar gwini 'vez lakaet e vez liou, muioh pe nebeutoh".* E verh Françoise, hi ne gav ket dezi 'ranker re derhel kont deuz al liou : er Minervois, o gwin a vez leun-chouk a heol. Anzao a ra eh eo dre an taol-lagad ha dre ar c'hwhez eh ever anezañ da genta. N'eo ket falloh kaoud eur fri tano : ma c'hwesez frouez ha spisou en eur bannah gwin, az-po c'hoant da dañva anezañ war-lerh.



# # Peb a damm blazig-blaz

# Fañch Broudig

Ar blaz a deu eñ deuz an tamm gwini, deuz douar ar gwiniogou, hag an doare ma sko an heol warne. N'eus ket daou amezeg hag a raje ar memez gwini : hervez Jean Calvez, *"memez 'barz ar hao amañ, n'eus ket diou wech ar memez gwini"*. An natur a gont, ha labour an den a ra ive ! Aze 'vez red delher krog dalhmad, 'pad c'hweh miz bepred. *"Ar gwini 'vez savet, red 'vez bezañ a-dreg atao. Ar gwini a zo beo. Evel eur bugel : ma na vez ket sellet deuz petra 'vez oh ober, e ra forz petra. Ar gwini zo heñvel"*. Klevit kentoh : memez ar zaillou ma vez lakaet ar gwini a gont kalz ; ma ne vent ket yah-mat ha propr da vat, ne ra ket vad d'ar gwini. *"Toud a gont, toud"*, ha poueza war ze a ra Jean.

## Gwerza o gwini Minervois... er bed-oll

*"Pez 'blij d'an dud 'barz on gwini, emezañ c'hoaz, me 'gred eh eo ar blaz e-neus hag e c'hwez. Se a blij da vat. Gwini naturel vez ordin ganeom. Ma mab-kaer 'vez gwini bio gantañ. Jamez ne ver klañv. C'hoarvezoud a ra gand eun den eva eur chopinad gwini re, med aze, en eur eva eur chopinad re, ne ver jamez klañv !"* N'ouzon ket hag-eñ eh eo gand eun tamm lorh pe evid farsal, med lared a ray deoh c'hoaz : *"se n'eo ket gevier"*. Ar pez a zo sur da nebeuta eo 'neus bet prizioù evid e win : ar priz braz e 1976, ha goude-ze medailennou aour, arhant, broñz, eun tamm a doud, ha gwir eo e sikour se eun tamm mad da werza. Ken e oa bet mil estonet e amezeien : penaoz 'ta e hall ar Breton-mañ tapoud prizioù evid e win ? A-raog e ree darn anê eun tamm fê war eur paotr arruet eno deuz keid-all : adaleg neuze

int deuet da gonta kaoz gantañ war an doare gwella da blanta gwini !

Eun hent all a zo bet tapet gand Françoise Frissant- Le Calvez. Sorhennet ma oa gand beajou ha gand ar broiou estrañjour, e kave dezi e oa deuet ar Frañs da veza giz-koz eun tamm mad evid pez a zell ar gwini. Ne veze komzet neuze nemed deuz gwini Bourdel, hini ar Bourgogn hag an Alzas. Hini al Languedoc ne oa ket prizet, pe nemeur. Koulskoude, e reer hirio gwini deuz ar gwella er Minervois, evel ma reer e Bourdel hag e leh all. Petra 'deus-hi greet, nemed mond da werza he gwini e broiou all an Europ da gomañs. Kas d'ar Hanada he-deus greet war-lerh : toui a hellan em-eus diskoachet deuz he gwini, dre zigouez penn-da-benn, en eur restaorant deuz Baie-Commeau, eur gêr 20 000 a dud, 400 kilometr deuz Kebeg war-zu an hanternoz !

Ne baouez ket abaoe da redeg ar bed. Gwerza a ra er Stadou-Unanet koulz hag er Chin hag er Rusi. E foar ar gwini Moskow, daou pe dri bloaz 'zo, eo bet dibabet he gwini evel an hini ar gwella deuet : eur gwir *"coup de cœur"*, kement hag ober. Red e vez, a-dra-zur, deski d'ar Chinaed ha d'ar re all n'eo ket heñvel an eil boutaillad deuz eben, ha pa deufent deuz ar memez kontre. Red e vez deski dezo dibab ar gwini a h a mad gand an eil meuz hag egile. Hirio, eo krog o mab Mathias hag o merh Sara, hag o-deus greet studiou war ar gwini o-daou, da labourad er gwiniogou hag er hao, ha da vond d'he heul d'ar broiou all : eur vicher da blijoud d'an nen eh eo, a houlen ampantiz ha gouiziegezh - hag eur bern labour, na vez desket nemed a-vuzur avad. N'eo ket

toud ober gwin mad en eur vro hag a zo mad evid se. Ma kaver anezañ da bremañ dre ar bed-oll, e vez red dalhmad rei c'hoant d'ar re all da dañva anezañ !

'M-eus aon avad, n'em-eus ket lared deoh c'hoaz pehini eo ar seurt gwin Minervois o-deus bet greet Jean Calvez hag e wreg, a ra bremañ o merh hag o mab-kaer, hag a raio o bugale-vihan abenn nebeud ? Eun ano kastell e neus, abaoe 1614 : "Château Coupe-Roses", kement hag ober ! Gwir eo a zo eur porched d'antreal er porz evel e n'eus forz petore kastell. Med n'eus dre eno nemed eur hao hag a haller goud dioustu eh eo gand eur Breizad eo bet savet,

e 1989 : eun erminig a zo kizellet a-uz da doull an nor.

Fañch Broudig

*Château Coupe-Roses, rue de la Poterie, 34210 La Caunette. Pellgomz : 04 68 91 21 95. E-mail : coupe-roses@wanadoo.fr. Lehienn internet : <http://www.coupe-roses.com/>*

*Doriou digor a vo gand Jean Le Calvez ha Françoise Frissant-Le Calvez e Kerdaniel, parrez Ploureh, d'ar 7 ha d'an 8 a viz kerzu da zond. Ema Ploureh hanter-hent etre Lanuon ha Plistin. Kerdaniel a zo war hent ar Yeoded.*

*Eur gwin all euz Bro-Minerv a zo bet laket e-touesk ar gwella gwin a zo er bed, e miz eost 2014, e Londrez : Château Cessero. Gwelit pelloh : <http://www.midilibre.fr/2014/08/12/le-chateau-cesso-ras-parmi-l-elite-mondiale-du-vin,1036681.php>*

*Minerve, unan euz brava kêriadennou Frañs : <http://www.les-plus-beaux-villages-de-france.org/fr/minerve-0>*

